

Sinema e brezhoneg



PACHAMAMA

Ur film bevaat sevenet gant Juan Antin



PACHAMAMA

Film bevaat / Frañs - Luksembourg - Kanada
2018 / 1ezh10 / Haut et Court
Seveniñ : Juan Antin / Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale

Tepulpai ha Naira, daou zen yaouank a-orin eus Aradennad an Andoù, a ya kuit eus o c'hêriadenn war roudoù ur vandennad Inkaed bet laeret digante ar Waka, totem gwarezus o re. O c'hest a gas anezhe betek Kuzko, ar gêr-benn real, sezizet gant ar Konkistadored.

Tri bed ha tri doare da welet ar bed a vez enebet gant ar film-mañ. Peizanted ar menez, Inkaed ha Konkistadored a vez diskouezet e pep a zoare disheñvel, evit o emzalc'h kement hag o neuz. Sell ouzh al livioù hag ar stummoù evit adlakaat pep **tudenn** en hec'h **endro** dezhi. Lak ar skeudenoù en urzh kronologel ar film.

